




# PEDENN

## ar Brizonierien breizat



### I

Dirazoc'h, Salver henniget,  
 Sellit ho preudeur daoulinet,  
 Brevet o c'halon gant glac'har,  
 Eveldoc'h-c'houi war eur c'halvar.

### DISKAN

*Sellit, o Jezuz, ni ho ped,  
 Poan ar zoudarded prizoniet  
 Ha roit pelloc'h ar peoc'h d'ar bed.*

### II

Truez ouzomp, o Doue mat !  
 Pegen reuzeudik eo hor stad !  
 Er prizon, pell diouz hon tud ker,  
 Mall bras eo ganeomp mont d'ar gêr.

### III

Kaer hon eus sellet a bep tu  
 N' welomp fin ebet d'an harlu  
 Penaos 'vevo du-ze hon tud ?  
 O sikourit, mamm ar Palud.

### IV

Hor sperejou, en noz, en deiz,  
 A nij beteg hon tudou keiz :  
 Peur 'hellimp gwelet adarre  
 Mammou, priedou, bugale ?

## V

Kennerzit d'eomp hor c'halonou  
 Ma hellimp gouzârv hor poaniou,  
 Gant karantez ha gant feiz krenv  
 'Vit gounit kurunenn an nenv.

## VI

Torrit buan hon hualou  
 Ma welimp c'hoaz hon douarou ;  
 Er gêr ni a heulio gant feiz  
 Kizou koz ha kristen hor Breiz.

## VII

Ha c'houi, Sent koz bro Breiz-Izel,  
 Klevit pedenn ho tud fidel ;  
 Savit hor Bro eur wechig c'hoaz,  
 'Vit ma vo ken kaer ha biskoaz.

## PEDENN AR GERENT

*Intron Varia ar Sklerded,  
 Santez Anna, hor selaouet,  
 Diwallit mat hor prizonier !  
 Hen digasit d'eomp yac'h d'ar gêr.*

**Aotre da voula :**

*Kemper, 22 a viz Gouere 1942.*

P. JONCOUR, *vikel bras.*